

# DALC'HOMP D'HOR FEIZ

## DISKAN :

Da feiz hon tadou koz, ni potred Breiz-Izel,  
 Ni zalc'ho mad ato ;  
 Vit feiz hon tadou koz, hag en dro d'he baniel  
 Ni oll en em stardo.  
 Feiz karet hon tadou, morse ni ho nac'ho  
 Kentoc'h ni a varvo.

1.

D'ar c'hrouadur bihan, e kichennig e gavel,  
 E lakit eur vam vad, en deiz evel en noz ;  
 Er boan hag en anken, houman buhan ra eur zell  
 Var ar groaz santel... e zonzj er baradoz.

2.

D'ar potr, d'ar plac'h yaouank, c'hui ziskouez hent ar  
 C'hui lavar en heuilla eb crena dirag den ; [furnez,  
 Bezit, tud yaouank Breiz, bezit epad ho puez  
 Ato gwir gristenien ha morse treitourien.

3.

D'an den koz gwen e benn, e korn an tan azezet  
 O skuill daelou a geuz var e amzer genta ;  
 Varlerc'h kals a boan, c'hui lavar, Salver ar bed,  
 Er baradoz e vo eürusted evitha.

4.

D'an den divar ar meas hag ive d'an den a vor  
 C'hui a ro nerz-kalon er poanioù stourm outho ;  
 Gouzout reont en env, e kavint oll dor zigor  
 Ar vuez vo bet tenn ; d'an drubuil kenavo.

Goulien, d'an 12 viz Ebrel 1906.

(Tous droits réservés.)

IMPRIMATUR : Quimper, le 13 Avril 1906.

F. CORRIGOU, vic. gén.

Kemper, mouliet e ti de Kerangal.

